


8N3-3-028

Adoration ha distro-Mission

E PLEUVEIL

Euz ar 25 a viz Ebrel d'ar 5 a viz Mae
1929

KANTIKOU



KEMPER

MOULLEREZ RU AN DUDCHENTIL, 7

Induljanz ar Maro mad.

Hon Tad Santel ar Pab hen deuz bet ar vadelez da lakât Induljanz braz ar maro mad kalz æssoc'h da c'hounit. Peb hini a c'hello breman gounit an Induljanz-se, epad zoken ma vezo c'hoaz var he yec'hed, hag e talvezo dezhan a benn ma rento he ene da Zoue. N'euz ken d'ober nemet mont da govez ha da gommunia (d'an deiz ma karer) ha, goude beza kommunit, kana pe lavaret devot ar beden-ma :

Ton : Elez euz ar baradoz.

O va Aotrou, va Doue, n'euz forz pe seurt maro
A garot choaz evidoun, me fell d'in hen reseo ;
Euz ho tourn, a greiz kaloun, m'en reseo a-vrema,
Gant holl anken ha poaniou va amzer diveza.

IMPRIMATUR :

20 a vis -C'huevrer 1929.

A. COGNEAU,

Vic. gén.

KANTIKOU PARREZ PLEUVEIL

KANTIK SANT MELLON

DISKAN :

*A vouez huel, a greis kalon
Pleuveilliz meulomp sant Mellon
Hor Patron karet hag hon Tad,
Mignon Doue ha Pastor mad.*

Evel kalz sent euz bro Arvor
Eo deut euz an tu all d'ar mor,
Rag e Breiz-Veur ez eo ganet,
Var zouar koz ar Vretonet.

Floc'hik e palez ar roue,
Mellon oe blienet gant Doue
En digasas da Rom eun deiz
Evit e c'hene! d'ar guir feiz.

Ar breizad yaouank, arog pell,
O klevet ar c'helou santel,
A droaz kein d'ar falz kreden
Hag eb dale e oe kristen.

Sant Stephan Pab er badezaz,
Beleg hag eskob er c'hrouaz,
Hag er guelomp, e bro Neustri
Krog gand al labour a zevri.

Eun niver bras a baianet,
D'ar feiz kristen zo gonezet
Dre m'ez dispar e brezegen,
E vuzudou hag e beden.

O velet hevelep labour,
E ya kounnar en enebour,

An diaoul a ra kement a c'hell
Da ziarben an den santel.

Mez gand sin ar groaz beniget
Ardou satan a zo trec'hed,
Ha doriou Rouen a zigor
Da Vellon he c'henta pastor.

An diaoul a gas euz ar c'horfou,
Ar pare ro d'ar c'hlenvejou,
Hag an dud varo, d'ar vuez,
D'e c'her a zistro a nevez.

Kroaz hor Zalver en e zaouarn,
En dro d'e gorf chaden bouarn
E vev er brasa pinijen
Tan ar garantez 'n e gere'henn.

Eno epad hanter kant vloaz
Denved Jesus hen a renas,
Evel ma ren eur pastor mad
Prest da rei evit-o e c'hoad.

Ha pred ar maro pa deuz
An env d'ez-han a zigoraz,
Jesus a lakaz var e benn
An dalvoudusa kurunen.

KANTIK SANT PHILIBERT

DISKAN :

*Sant Philibert, hor patron,
Selaouit hor peden,
Gant fizianz a greiz kalon,
Ni 'ra deoc'h hor goulenn,
Varnomp, var tud hor parrez
Skuillit puill ho pennoz,
'Ma vo santel hor buez,
'Vit mont d'ar Baradoz.*

*Yaouankik e z'oc'h kasset
Da balez ar Rouë,
Hag o peuz eno miret
Holl gened oc'h ene ;
Grit eur zell a vadelez
Ouz hor bugaligou,
Ha lilien an elez
'Vo en ho c'halonou.*

*N'o poa nemet ugent vloaz
O tilezel ar bed,
Varlerc'h Jezuz hag he groaz
Mall oc'h euz da gerzet ;
Elec'h madoù danjuruz
E plij deoc'h ar beden,
Ha d'ar gouent e z'it eüruz
Gant ho mignoun sant Ouen.*

*'Vit goudori oc'h ene,
Jumiej o peuz savet,
Jumiej eo, dré c'hras Doue,
Ho neiz muia-karet,
Hag eleiz a ziskibien,
Er joa, el levenez,
Ganeoc'h ouz ar bec'herien
A zesko kaout trüez.*

*C'hui zo bet ouspen eur vech
Gant kalz drouk-prezeget,
Ha, daoust ma z'oac'h direbech,
En eur prizon taulet,
Heb en em glemm, e pedit
'Vit an drouk-prezeget,
Ha laouen e pardounit,
'Vel ma reaz hor Zalver.*

TON : *Santez Mari, mamm Doue.*

*Mez ma z'eo braz ho touzder,
Eo braz ho nerz-kaloun,
Itak d'eun tyrand, he zever
A ziskouezit heb aoun :
« Ebroin, oc'h euz lavaret,
Roit d'an Iliz ar peoc'h.
Pe justiz Doue kounnaret
A gouezo stard varnoc'h ».*

*Siouaz ! 'vel guechall Ebroin,
Tud fall en hon touez
A ra d'al lezen divin
Eur brezell didruez ;
Ho sikour a c'houlennomp
Evit difen hor feiz,
Ma vezit ato ganeomp,
Den n'he zenno deuz Breiz.*

*En enezen Noirmoutié
O peuz pell-braz bevot,
Eno servicha Doue
'Zo bet ho c'hoant bapret,
Ar brud euz ho vertuziou
A drouz ar Frans a bez,
Domezoun ar miraklou
A verk ho santelez.*

*Unan a ioa hir amzer
O c'houlazaon kalz a boan
Gant eur güentl ken dizesper,
M'oa var he dremenvar ;
Sin ar groaz a rit varnhan,
Pebez burzud ! Kerkent
An drouk a dec'h diouthan,
Yac'h oa 'vel diagent.*

*Martolodet euz hor bro,
E spount hag en anken,
'Ioa e danjer a varo,
Tostik doc'h enezen,
Ganeoc'h int bet diouallet,
Pedit holl heb skoazel,
Diouallet c'hoaz, ni ho ped,
Martolod Breiz-Izel.*

*Ia, ma zoc'h bete-vrema
Ken douz en hor c'henver,
Eo red deoc'h neuze beza
Eun tad muioch tener,
Netra ne c'hellit refuz
Hirio d'ho pugale,
C'hui pezo digant Jezuz
Peb mad 'vit hon ene.*

*Sant Philibert benniget,
Dreist-holl ni a c'houlenn
Beva bapret unanet
Gant al lezen gristen,
N'or beuz nemed eur galon
Ama d'oc'h henori,
N'or bo nemet eur galon
Er bed-all d'ho meuli !!!*

KANTIK DA ZANT ROCH

TON : *Neb a gar beva fur ac eüruz.*

DISKAN :

*Sant Roch, patron meurbe gallouduz
Euz an dud klanv hag ankeniet,
Pedit hor Zalver tragareuz
D'hor miret holl diouz peb klenvel.*

*Diskennet euz eul lignez huel
E rannit d'ar paour ho tanvez,
Evit galloud beva ha mervel
En dienez, er baourentez.*

*Redek a rit da zicour karioù
Strafuillet holl gant ar vossen ;
E peb karter e rit burzudou,
E tennit an holl a anken.*

*Soulaji a rit gant madelez
Ar glanvoudien gæz dilezet
Ho pedennou hag ho santelez
E peb leac'h a voug ar c'hlenvel.*

*Vit ho nessa c'houi offr ho pue ;
Kalz a zeu d'ho tigemeret
Evel eun æl dent a berz Doue
Da zouten an dud trubuillet.*

*Brema c'hoas euz a lein an Envou,
Gant ar garantez ar vrassa,
He vougit kren e kalz a vroyou
Ar vossen hag ar c'holera.*

*C'houi er goar, patron karantezuz,
Hor pec'hejou, hor goal vue
A denn varnomp klenvejou spontuz :
Grit ma tistroimp ouz Doue.*

Sant Roch, skouer euz an holl vertuziou,
Grit ma kuitaïmp ar pec'het,
Ha ma c'heuilimp oll oc'h exemplou,
Vit beza en env kurunet.

KANTIK ILIS PLEUVEIL

CONSACRET D'AN 11 A VIZ HERE 1893.

Var an douar evel en Ee
Gloar ha meuleudi da Zoue ;
Var an huel hac en draonien
Ra vezo meulet da viken.

Ia, da Zoue gloar da genta,
Eb ners e c'hras n'hellomp netra :
N'hellomp sevel goude cals poan,
Na lochen soul, na ti balan.

N'hellomp sevel nebeutoc'h c'hoas,
Na pales kaër, nac ilis vras ;
Doue voa ganeoc'h Pleuveillis...
Rac setu peur c'hreat oc'h ilis.

E maï peur c'hreat sellit outhi...
Kaer eo ha koant dreist peb hini,
Kouls ha rouanes eo guisket
Gant ha zae mein danteleze.

Dre bep prenestr ar sklerijen
A dars pinvidic ha laouen ;
Pa zellin ous an teir aoter
Tri droun a velan d'hor Zalver.

Ar pillerou nerzus ha teo
A zo hevel eus guez dero ;
Dindan ar beac'h ne blegint ket,
Chom a rai sounn ho fenn kalet.

Breudeur na c'hui zo evurus
Da rei digemer da Jesus,
Da rei dezhan enn oc'h ilis
Ker pinvidik, ker brao lojeis.

Ma coustas deoc'h a koustet eo
Bezit laouen evelato ;
Rei dan ilis, d'ar zent ive
A dal ouспен prena leve.

Bennos, bennos da gement den
En deus digaset aluzen :
Grit va Doue, grit ma cavo
Eas ar vuez, dous ar maro.

A Galon vad, o va Doue,
Ni ro lojeis d'ho majeste ;
Ah ! diskennit gant oc'h Elez
Da jom bepred enn hon touez.

Er gout a reomp eur pales aour
Ne ve nemet dister ha paour,
Mes, c'hui ganet enn eur c'hraouik ;
Ne glaskit ket traou pinvidik.

C'hui deu da glask hor c'halonou
Deoc'h e vezint o va Aotrou ;
Eur galon hor bezo ebken
Ha deoc'h e vezo da viken.

Ni garo Doue dreist peb tra,
Ni garo ivez hon nesa ;
Evel ar mein hor beus savet
Atao ni jomo unanet.

Ha c'hui tud koz, doun er beziou,
C'hui pezo pers er pedennou
A raïmp aman enn ho kichen
Hed sacrific an oferen.

Ia, kouls ha c'hui Pleuveillis
A zalc'ho stard, ha stard d'ho feis,
D'ho feis koz enn ilis nevez
Hirio, varc'hoas ha da james.

Pa zeo eman ti ar beden
Selaouit Jesus hor goulen :
E Breiz-Izel hag e pep bro
Ra vezo meulet oc'h hano !

Ra vezo caret ar Verc'hez
Hac ilis Rom hor magerez :
Tennit pelloc'h bagit sant Per
Eus ar mor rust hac ar reier.

Hor mirit holl dious ar pec'het
Dious ann tan goal hag ar c'hlenvet
Pellaït ar maro spountus
A deuffe gant e falc'h e kuz.

Roit eost founnus d'ar parkeier,
Glasder ha iet d'ar prajeier,

Roit e vara da bep hini
Hac eur galon iac'h d'en dibri.

O va Doue, p'hor beus savet
Eunn ilis d'ho tigememet :
Roit d'eomp-ni oll er barados
Eur plasik eun deis da repos.

Grit ma velimp tostik d'ho tron
Ar Verc'hes ac hor sant patron
Grit ma canimp gant-ho enn Ee :
Gloar ha meuleudi da Zoue.

BREURIEZ AR VUGALE

DISKAN

*Breudeur bihan Breiz-Izel
Meulit Doue ho Tad,
Da veza grêt deoc'h genel
E Breiz, en eur vro vad.
Ni siouaz ! a zo ganet
Touez an dud divadez,
Ni siouaz ! zo dilezet
Gant hor mam didruez.*

Lavarit deomp, breurigoù,
O'chom er broioù pell,
Perak var-zu an envou
Ne droit morse ho sell,
Evel m'hon deuz-ni desket
Gant hor mammou kristen
Var ho brec'h p'edomp douget,
P'edomp var ho barlen ?

Lavarit deomp, breurigoù,
Ha klavet peuz biskoaz
E z'euz eur Mestr en Envou,
En tu all d'an oabl glaz ?
« Eur Mestr leun a zantelez
« A zo er Baradoz,
» Hag en dro dezhan Elez
» O kina deiz ha noz. »

Ton kelven.

Lavarit deomp, breurigoù,
Piou eo en deuz krouet
An heol azioc'h hor pennou,
Al loar hag ar stered ?
« Ni a voar int gant Doue
» Krouet euz a netra,
» Ganthan int laket a-ze
» Dirazomp da bara. »

Lavarit deomp, breurigoù,
Piou eta a viskaz
Ho mantel aour d'ar bleunioù,
D'ar gwez ho mantel c'hlaez ?
« Ni voar eo Mestr an Envou
» En deuz krouet ker mad
» An dero zo er c'hoajou,
» Ar ieuten zo er prat. »

Lavarit deomp, breurigoù,
Piou ro deomp ar vuez,
Da greski a nebendou
Ha piou hon lak bemdez ?
« Ni voar teu digant Doue,
» Ha diganthan hebken,
» Hor c'horf koulz hag hon ene,
» Hag oll vadou an den. »

Lavarit deomp, breurigoù,
 Piou roaz d'ar goulmig.
 Pleun kergwenn hagar bleunioù,
 Ha mouez dous d'an eostig ?
 « Doue a ro he c'hened,
 » He dra da bep hini,
 » Eur galon vit he garet
 » Eun teod vit he veuli. »

Lavarit deomp, breurigoù,
 Piou a lak da zevel
 Ed alaouret er meziou,
 Ha frouez er gwez huel ?
 « Doue a lak ar c'hreunen
 » Da zlouan en ero,
 » Ma ne vennig hor c'houezen
 » Biken eost ne zavo. »

Lavarit deomp, breurigoù,
 Perak var hon daoulin
 Ni ra bemdez pedennou
 Da noz ha da vintin ?

« Ni hon deuz desket pedi
 » Doue e tri Ferson,
 » He garet, he adori,
 » Rei dezhan hor c'halon. »

Lavarit deomp, breurigoù,
 Petra a zigouezo
 Pa vezo hor bloaveziou
 Falc'het gant ar maro ?
 « Ni a voar goude mervel
 » E z'euz eur vuez all,
 » Baradoz d'an dud santel,
 » Hag ifern d'an dud fall. »

Ni a glev, breudeur bihan,
 Ho klemmou truezuz,
 Goulen a rit hep ehan
 Anaout, karet Jezuz.
 Ni a rolo aluzen
 Evit ho Preuriez,
 Ni lavaro eur beden
 Evidoc'h aliez.

G. - H.

KANTIK SANT IZIDOR

Patroun al Labourien douar.

VAR DON : Kelven, pe : Breuriez ar Feiz.

*Sant Izidor benniget, patron al labourer,
 Ra vo meulet hoc'h hano dre holl, e peb amzer ;
 Al labourerien douar a c'houlou ho pennoz,
 Ma vint ganeoc'h sikouret da vont d'ar baradoz.*

Izidor a oa ganet e Spagn, en eur gêr vraz (1),
 Hag eno a-vihanik 'vel eur zant e vevas.
 Bet hen doa digant Doue kerent mad ha santel
 Aketuz da zoursial ouz ene ho bugel.

P'e deut en oad Izidor da c'hounit he vara,
 Da di eun den pinvidik ez a da zervicha ;
 He vestr, hanvet Yann Vergas, hen doa kalz douarou,
 Ha ganthan e oue karget da ren al labourou.

(1) E Madrid, kêr kapital bro Spagn.

Euruz ar penn-tiegez, pa c'hell fiziout peb tra
 En dud a rank da gemer 'n he di da zervicha.
 Euruz ar zervicherien a gav tiez kristen
 Lec'h ma ve lezen Doue heuillet a benn da benn.

Bep mintin, sant Izidor oa fidel d'he beden ;
 Bemdez zoken oa kustum da vont d'an oferen ;
 He holl zevosionou vije achu abred,
 Hag euz labour he zevez ne réant gaou ebet.

Daoust ma oa en he labour ar Zant direbech kaer,
 Guall deodou hen tamallas divarbenn koll amzer ;
 He vestr hen dije kredet, panefed ma plijas
 Gant Doue, d'hen didrompla, ober eur burzud braz.

Mestr Izidor, eun devez, da c'hout ar virione,
 A ia var he zouarou da ober eur bale.
 Guelet 'ra he zervicher 'kreiz eur park oc'h arat,
 Gant daou El guenn 'n gichen, daou El o labourat !

Liez a vech, dorn Doue a réas burzudou,
 Evit lakât da bara muioe'h he vertuziou ;
 Eur vech, gant beg he c'harzou, 'n eur skei var an douar,
 Ar Zant 'lakas da zevel eun eienenn dispar.

Meur a vech all, d'he vignoun Doue 'rentas henor :
 Diou vech ar boued a greskas dre beden Izidor ;
 Ar Zant a oa he galoun ker mad euz ar beorien
 Ma kave gras ho guelet, ha rei d'e aluzen.

Ni labourerien douar, evel hor patrour ker,
 Hervez bolontez Doue, implijomp hon amzer ;
 Pedi, gouzanv, labourat, rei sikour d'an dud kez,
 Eo merk ar vuez kristen, guir hent ar zantelez.

KANTIK SANT YANN VADEZOUR

VAR DON : Euruz an hini.

DISKAN :

*Jezuz he unan, Jezuz hen lavar :
 Sant Yann Vadezour n'hen deuz ket he bar (bis).*

An El Gabriel da Zakariaz
 A annons eur mab, a vo santel braz.

Doue he-unan, dre c'hinou an El,
 A verk e vo Yann hano ar bugel.

Dre eur c'hraas dispar, 'raok ma teu er bed,
He ene dija zo dibec'h ha net.

Gant Doue oa bet choazet a-viskoaz,
Evit prepari hent ar Messiaz.

D'he ziskiblen ker e laro eun de,
'N eur ziskouez Jezuz : « Setu Òan Doue » !

He gomzou, he skouer d'an holl Juzevien
A zeske dalc'hmad ober pinijen.

Ne baouez da skei var ar goal dechou,
A strink en ifern kalz a eneo.

Kalonek e stourm 'vit ar burete,
Prest, 'vit he difen, da goll he vue.

Hervez bolonte eur plac'h dirollet,
Dre urz Herodez ez eo dibennet.

O Merzer santel, sikour, ni ho ped,
Ma vo hor buez fur ha pur bepred.

Plijet hon diouall, dre ho pedennou,
A enep ar bed hag he zanjeriou.

Sant Yann beniget, ken karet e Breiz,
Dalc'hit deomp bepred sklerijen ar feiz.

KENTELIOU AR GROAZ

VAR DON : D'hor Mamm Santez Anna.

DISKAN :

*Kanomp holl, kristenien,
Kanomp a vouez huel :
Bremen ha da viken
Henor d'ar Groaz santel !*

Bepred, elec'h ma vo
Dirazhan Kroaz Jezuz,
Eur c'hristen a gavo
Kenteliou talvouduz.

Kroaz an tour.

Divar beg an touriou
Ar Groaz lavar dalc'hmad :
« Kristenien, d'an envou
Savit ho taoulagad ! »

Kroaz an hent.

Ar Groaz var an henchou
'Lavar d'an tremener :
« Guir hent bro an envou
Eo hent Kroaz Hor Zalver. »

Kroaz an tl.

Dirag holl dud an ti,
Ar Groaz ouz ar voger
A zesk da bep hini
Derc'hel mad d'he zevel.

Deski 'ra d'ar bugel
Beza bepred sentuz ;
Senti betek mervel
Zo bet buez Jezuz.

Kroaz an aod.

Ar Groaz, pa ve savet
E kichenik an aod,
A ro fizianz bepred
D'ar paour kez martolod.

Kroaz ar varn diveza.

Pa zeui, da fin ar bed,
Jezuz evel barnet,
He Groaz a vo gullet
O lugerni en aer.

En eur velet ar Groaz
An dud fall a greno ;
An dud vad gant joa vraz
Er c'hontrol a drido.

Grit deomp, Salver Jezuz,
Dre verit ho poanion,
Gant an holl dud euzuz
Mont neuze d'an envou.

D'an tadou ha mammou
E lavar Hor Zalver :
« Beillit var eneo
Eneuz prenet ken ker ! »

Kroaz an ti d'ar c'hlanvour
Zo ive presiuz ;
Ennhi e kav sikour
Da veza gouzanvuz.

Kroaz ar gador-govez.

Kroaz ar gador-govez
A ro keuz d'ar pec'her.
Bet eo ken didruez
E kenver he Zalver !

Kroaz ar bezlou.

Ar Groaz var ar beziou
He deuz eun nerz dispar
D'ober d'ar c'halonou
Dougen pouez ar glac'har.

KANTIK SANTEZ ANNA

*Kristenien Breiz Izel,
Meulomp holl, en deiz-ma,
Hor Patronez santel,
Hor Mamm Santez Anna.*

E kalon peb Breizad
Doun e kaver skrivet
Hano dous ar Vamm vad
A gar ar Vretoned.

Ganhi eo bet ganet
Ar Verc'hez Mamm Doue
Ha, dre-ze, eo savet
D'eur renk huel en Ee.

He galloud a zo braz,
He madelez ive ;
Ne zisprijas biskoaz
Peden he bugale.

Soudarded, moraerien,
Araok mont euz ar ger,
Diganthi a c'houlenn
Ho diouall en danjer.

Ar vamm gristen he fed
Evit he bugale,
Ma vint fidel bepred
Da heuill lezen Doue.

Dalc'hmad ar Vretoned,
En ho foanion brassa,
A zavas ho spered
Varzu Santez Anna.

Hirio zo ezom braz
Da c'houlenn he skoazel,
Rag a bep tu, siouaz !
Ne veler 'met brezel.

Er barrez, ni ho ped,
Lakit peoc'h, union ;
Kreskit ennhi bepred
Ar gwir devosion.

Itron Santez Anna,
Hor mirit deiz ha noz,
Ha dalc'hit d'hon hench
Varzu ar baradoz.

KANTIK AN OFEREN

Ton : *O Kaloun Zakr, pe : Euz a vremen.*

DISKAN :

*Kinnigomp holl ar Zakrifs,
Gant hor mamm zantel an Iliz,
Sakrifs divin Hor Zalver,
En em ginnig var an Aoter.*

E sakrifs an oferen,
Jezuz a ra d'he veleien
Nevezi, 'n eun doare dispar,
Sakrifs braz Menez Kalvar.

An Oferen !... *Pebez tenzor !*
Dreizhi Doue a gav henor ;
Dreizhi e teu d'hon enëou
Bennoz Doue gant he c'harrassou.

Va Doue, deoc'h e kinnigan
Gant resped an oferen-man,
D'hoc'h adori : da ziskleria
Ez oc'h hor Mestr, ha Mestr peb tra.

Ouzpenn, 'vit ho *trugarekât*
Da veza 'n hor c'henver ken mad :
Holl diganeoc'h hon euz bemdez
Madoberou, grassou nevez.

Siouaz ! 'n hor huez tremenet,
Omp koeuzet mil guech er pec'hed ;
Jezuz, dre verit ho poaniou,
Pardounit deomp hor pec'hejou.

Dre an oferen-ma ive,
Plijet ganeoc'h, o va Doue,
Pa 'z eo ken paour hon enëou,
Rei deomp aluzen ho krassou.

Kinnig a reomp an oferen,
'Vit ezomou ar bed kristen ;
Mes, evit tud ar barrez-ma
E fell deomp pedi dreist peb tra.

8. Dre nerz ar zakrifs santel,
Ra vo diouzomp kasset pell
Al leoudouet, ar gassouni,
Ar pec'hed vil, ar vesventi.

9. Ouz an Anaoun, o va Jezuz,
Grit ive eur zell truezuz ;
Ha varnho lakit da zisken
Ho koad sakr evel eur c'hlizen.

10. Ra vo heb dale diboaniet
Hor c'herent hag hor mignouned ;
Roit dezho, dre an oferen,
Ar peoc'h a bado da viken.

11. Guerc'hez Vari, va Mamm garet,
E harz ar groaz ken glac'haret,
Va zikourit da skriva doun
Pemp goulit Jezuz em c'haloun.

12. Ha c'houi, holl Zænt ha Sæntezed,
Ha c'houi, holl elez benniget,
Deomp holl roit skoazel ho peden
Da glevet mad an oferen.

KANTIK AN AVE VERUM

Var don : *Jesu, dulcis memoria.*

Ni ho salud a greiz kalon,
Ni ho salud, o korf guirion,
Zo bet ganet evidomp-ni,
Ganet gant ar Verc'hez Vari.

Ni ho salud, guir gorf Jezuz,
Bourrevet 'n eun doare skrijuz,
Ha lazet ouz ar groaz zoken,
Evit silvidigez an den.

Diouz ho kostez, pa oue toullet,
Ha dour ha goad zo diredet.
En hosti zakr bezit hor joa,
Pa dostai hon heur diveza.

O Jezuz dous, trugarezuz,
Mab ar Verc'hez madelezuz,
Ouzomp-ni holl pec'herien gez
Plijet ganeoc'h kemer truez.

KANTIK EN HENOR D'AR ZAKRAMANT

O Sakramant burzuduz,
Leac'h omp maget gant Jezus !
Ennhan e-ma Hor Zalver ;
Kredi a ran var he c'her.

Jezuz, d'an noz kent mervel,
'Ro galloud d'he Ebstel
Da jench ar bara, ar guin
'N he gorf hag he c'hoad divin.

Ar veleien, d'ar gorreou,
A gonsakr gant he gomzou,
Ha Jezuz, mestr braz ar bed,
Ouz ho mouez a zent bepred.

Heb kuitât he varadoz,
E chom amañ deiz ha noz ;
Chom a ra en hon touez
Dalc'het gant he garantez.

Euz ar guin hag ar bara
Petra jom ? Ne jom ken tra
Nemet ar spesou dister
A guz korf, goad Hor Zalver.

Aman n'hellomp ket kounpren ;
Ar feiz hebken hor c'helen...
Gant ar feiz sklerijennet,
Ne fazi ket hor spered.

E doare ar sperejou
Eo 'n em laket en hostiou.
Pa vez an hostiou torret,
He gorf sakr n'eo ket rannet.

Neb ia d'ar gommunion
Gant ar pec'hed 'n he galon
A gemer skouer var Judaz,
Hag a ra eun-torfed braz.

Mes, pa vez, araok tostât,
Ar goustianz e stad vad,
Unanet gant Hor Zalver
Guir eurusted e kaver.

Meulomp, karomp, adoromp
Eun Doue ker mad ouzomp.
Red eo sonjal dreist pep tra
En he zonezoun gaera.

Jezuz eo ar Roue braz ;
Adorit-hen var he groaz,
Hag en Ee, hag e myster
Sakramant sakr an Aoter.

KANTIK AN ADORO TE

Var don Breuriez ar Feiz pe Elez euz ar Baradoz.

M'hoc'h ador gant karantez,
Jezuz, Doue kuzet,
Zo aman e guirionez
En hosti konsakret ;
Lakât a ran va ene
Da zuja-deoc'h a-grem,
Rag, evit kompren, morse
Ne c'hellin dont a-benn.

Aman 'fazi an daouarn,
An daoulagad, ar staon ;
N'euz nemet d'an diskouarn
'Heller kredi heb aoun.
Me gred kement 'neuz laret
Jezuz guir Vab Doue.
Peleac'h eñnoc'h vo kavet
Komzou ar Virione ?

Var ar groaz ne oa kuzet
Nemet Doue hebken,
Mes an hosti konsakret
A guz ive an den.
Stard koulz-koude a gredan
Ez eo Den ha Doue.
'Vel al laer deo e klaskan
Rouantelez an Ee.

Ne velan, e nep doare,
Merkou ho pemp gouli,
Mes en ho tivinite
Me a fell d'in kredi.
Grit d'ar feiz kreski ennoun,
D'an esperanz ivez,
Ha dounnoc'h e va c'haloun
Lakit ho karantez.

C'houi 'ra deomp sonjal bemdez
E maro hon Doue,
C'houi, ar bara a vuez
A zalc'h beo an ene.

Bezit guir vagadurez
D'am ene, va Zalver ;
Grit d'in tanva heb paouez
Ganeoc'h-hu mil dousder.

O Pelikan beniget,
O Jezuz, va Aotrou !
Gant ho koad ra vo goalc'het
Stlabez va fec'hejou.
Euz ho koad sakr ken nerzuz
Eur beradik hebken
Hen deuz avoalc'h a vertuz
Evit prena pep den.

Dindan ar spesou breman
Me ho kuel, va Doue.
Roit d'in ar pez a glaskan
Gant holl nerz va ene.
Grit d'in gueleit dizolo
Ho pizaj dudiuz
Hag, ouz ho kueleit, ato
Beza ganeoc'h euzuz.

TAOLENN

Induljanz ar Maro mad.....	2	Kantik sant Yann Vadezour.....	9
Kantik sant Mellon.....	3	Kenteliou ar Groaz.....	10
Kantik sant Philibert.....	4	Kantik santez Anna.....	11
Kantik da zant Roch.....	5	Kantik an Oferen.....	12
Kantik ilis Pleuveil.....	6	Kantik an Ave Verum.....	13
Breuriez ar Vugale.....	7	Kantik en honor d'ar Zakramant.....	14
Kantik sant Izidor.....	8	Kantik an Adoro te.....	14

